

(244)

Guery Neverz

Var sujet ar muntre coumettet var Yoen Grall, hostis en Landivisiau,
 en novez ar 30 d'ar 31 eus a vis Guenveur 1844, gant
 Louisa Ego, e vreg, ha Yoen Renaot, pere zo condonnet d'ar
 Maro, en tribunal Kemper, ar 4 eus a vis Eost 1844.

Var ton Guery Theophilus.

Ranna ra va c'halon gant ar glac'har em c'kreiz,
 O sonjal pequer stanc eo ar c'krimou en Breiz:
 A boan e zeus c'hoec'h mis d'eur maro cris voet test,
 Ma ranqer adare quelet memes arvest.

Allas! ò va Doue ret eo disclêrya c'hoas
 Eun torfet hac a blonj er galonou ar gloas:
 Eur c'krim meurbet euzus a zo bet coumettet
 En qer Landivisiau... An oll zo spouronet.

(245)

An naoret varmugent a c'henveur divea,
 Grall a ro eur repas d'e dud gant calz a joa.
 Da zeg heur eus an nôs e zeas da gousqet,
 Leun a gontantamant ha laouen e speret.

An deiz varlerc'h vintin, er gambr p'oet antreet,
 E cavigot Yoen Grall en e voele lazet
 Gant eun tenn fusuill voa tennet dindan e c'hronch:
 An oll voa spouronet, n'ouiet petra da zônch.

Eur fusuill, evit guir, voa var ar gambr ene,
 Hac eur ruban stâguet eus ar gache ive.
 Gement-se a drouble an dud a voa eno:
 Ne vouient da betra tamal eur seurt maro.

Ar barner eus a beoc'h zo qerqent êruet;
 Houde e enclascou en deveus constatet
 Penos voa n'em lazet e-unan Yoen Grall,
 Ha dre ze ne voa qet da damal da zen all.

240

Daou zen eus a justis a zisqennas en ty,
 Erit ellout essat dont d'en em assuri
 Var guirionez ar c'hrim, hac o deus decidet
 E zoa Groll e-unan a voa en em lazet.

Ne gomzet mui nemeur demeus an affer-ze;
 Marteze e sonjet e chomje evelse;
 Lez ar Roue souden a zo bet instruet
 Eus an torfet euzus a bini e comzet.

(246)

An ugent a vis cost, hep na voat o sonjal,
 E zoa var lec'h ar c'hrim eun avocat-general
 Hac eur c'honseiller eus lez royal a Roason,
 Vit en em assuri eus ar pez voa guirion.

An Autrone-ze zo chomet ugent devez
 En gter Landivisiau gant ar brassa eves
 Erit donet abenn eus ar pez a glasgent,
 Hac anfin, goude oll, qendrec'het mat e voent.

Goude meur a enclasc, ec'h ordrenjont qemer
 Louisa Ego, greg Groll, hac er memes amzer
 Ivo Yoen Renaot, dre ma voant soupçonet
 Da vea bet o daou autoret an torfet.

Da brison Montroulez qerqent voent digasset
 Erit, en tribunal, bea interrojet.
 Eno en audianq neuze e tecider
 O c'hass da gondaoni da tribunal qemper.

Ar zeizvet varnuquent demeus a vis even
 A brison Gec'h-Joli o gueljet o tisqen,
 Hac e voent conduet da Guemper d'ar prison,
 Da zepord deiz terrubl o c'hondaonation.

(247)

Eur mis just int chomet ebars er prison-ze,
 O tepord gant eneres ar moment hac an de
 En pere e vije var o stat decidet,
 Pe int a voa coupabl pi'otramant ne voant get.

D'al lun, nao varnuquent demeus a vis gouere,

Dorojou o frison a zigor diraze,
 Hac e voent cunduet diouc'h-ti d'an tribunal,
 El lec'h m'[e]zo digoret an odianz ractal.

Eur foul eus ar vrassa voa eno diredet,
 Leun sonn e voa ar gal, dre oll e voat goasqet;
 An daou accuset zo bet qerqent arzet
 Var o banc, vis-à-vis d'an Autrone Yureed.

Ouspenn pèvar-ugent têt a zo bet clêvet,
 Ar pezh a quemeras eun amzer vras meurbet.
 Seiz devez e zo bet padet an debatoù;
 An de n'oa qet avoalc'h, ret e voa caout goulou.

Anfin, d'ar bêvar cost, da dost da anter-nos,
 Ar jury a antre... An oll zo o c'hortos
 Gant an eves brassa var an daou accuset
 (248) Menos eus ar Jury... Den na vronje ebet.

Chef ar Jury neuze en devez disclêryet
 E voa 'n daou accuset otoret an torfet.
 D'ar maro int o daou condaonet goude ze:
 En qer Landivisiau e collint o bue.

Heur o barnediquerz a voa eun heur eürus,
 An heur m'en devoe lec'h ar c'hrim qer horrerus.
 Ze a dleye laqat anê da gaout sonj mad
 Eo anaveet ar c'hrim abred pe diveat.

O clêvet e setanz, Renaot rê nebeut cäs,
 Mes Louisa a voele gant eur goal glac'har bras.
 Lec'h e devoa certen, e sonjal dont d'e brô
 Da zouffr dirac an oll an terrupla maro.

Rappellet o deus bet d'al ley cassation,
 Mes approuvet eo bet o c'hondaonaton;
 Sonjal a reant caout o graf ouz ar Roue;
 Mes penos en obten vit o c'hrim, va Doue!

D'ar meurs, daouzez mis du, Renaot zo êruet
 En qer Landivisiau, hac er prison laqet,

242

Da zepord antronos eur maro horrenus ;
Renaot n'em abandon da vadelez Jesus.

(249)

Da unnec heur- anter e zeo bet unduet
Var blacey vras ar foar, elec'h ma voa savet
Instrument ar maro ; daou vinistr a Jesus
A zisqueze an ên da Renaot maleurus .

An drizec a vis du eus ar bloa tremenet
E d'oa Barba Ropars coumettet e zorfet ;
An drizec a vis du, ar maleurus Renot
En qoer Landivisiau zo pignet d'ar chaffot.

Presantet voe deân ar gousifi santel ;
Bogat a ra dean gent monet da vervel .
— « Pardon ! ô va Doue ! mont a ran d'ar supplig,
» Da repari va c'krim dre 'r brassa sacrific . »

Breizis, gvir gristenien, c'houi pere a voe test
En qoer Landivisiau eus ar horrubl arvest,
Pedit evit Renaot, ma yêlo da repos,
Gant graç euy Doue mad, gantân d'e varados .

Ar fin maleurus - mân a dle dont da laqat
Ar c'hoant da heuil atao peb compagnonez vad ;
Tec'hit ouz al luxur, sourcey a vil bec'het,
Bevit honestamant, christenien mat bepret .

(250)

Maleurus den yaouanc ! perac ne c'heus tec'het
Objet eus da youl fall, p'e c'heus anavezet !
Te voa grêt da ober boneur da oll ligne ;
Bremân vint maleurus ar rest eus o bue .

Louisa Ego a chom en Qemper er prison,
Da c'hortos partial evit mont da Roason ;
Ar c'hraç eus e buez vo eno dei lennet,
Hac en Landivisiau goude-ze exposet .

Elec'h souffr ar maro, vit e c'hondaonaton,
E tren eno ar rest e buez er prison .
Eno c'hello sonjal peguement maleurus

E zoar d'en em bellat demeus hent ar vertus .

Eur bobl niverus bras a voa en em rentet
Var blacen ar supplis, mes pa zint bet quitted
Eur dristidiguez bras o laqe en glac'har !
Allas ! quelet a rent cass Renaot d'an douar !

(251) Istie'quet ar bobl, a voa en em gavet,
E voa ousten-ze c'hoas eno en em rentet
Archerien Montroulez, Castel ha Landerne,
Hac anter-cant soudard a [voa] ive ene.

Pa guittas ar prison a Guemper e c'houlen
Pelec'h e voa Louiza, hac hi deuje souden.
Ar bèleq a respont : Louiza zo graciet,
Hac ar paour qez Renaot en deveus lavaret :

O Doue, va C'hrouer ! m'ho suppli ma teuyo
D'en em gouvertissa erwat Louisa Ego .
Graç ma teuyo d'ober eur binijen guirion,
Ha ma ello ouzoc'h obteni ar pardon .

Person Landivisiau, leun demeus a anqen,
A adres en ilis da Toue e beden
Erit ar maleurus, pa zea d'ar maro :
Enor ra vo dean en pèvar c'horn ar vro .

Euy dristidiguez bras a eljot remercout
Var bisajou an oll, diredet a bartout.
Oll e clement Renaot ; peb-den a greiz calon
A implor eritan ouz Doue ar pardon .

Lédan .

Copi eus a lizer Renaot d'e dad .

(252) Va zad qez
Pa recevot al lizer-mañ, ho mab maleurus en devezo achuet da
vera .
Demeus a tribunal an dud en devezo da dremen da un tribunal oll, en
pehini en deveus ar goufianç ferm da nompas e gasut didruez .

244

Roet e meus bet deoc'h lec'h eus a galz a boanniou epad rën va buez nebeut padus; qemer a rân ar moment - m'ân evit testeni deoc'h va oll queuz, hac ofte-ni ar pardon aus anezh. Mar deuvvezit en accordi, n'am anconnac'hait get goude va maro.

Offr a ran ivez, va adie d'am breudeur ha d'am c'hoarezet mad; ra na dec'hint en nep tra demeus a hent ar vertuz; ra heuillint an abou mad a zo bet roet dezho gant o zad vertuzus. Ellout a rân assuri dezho ne gavint ar bonneur, memes adalec ar vuez - m'ân, remet en pratêc givirion demeus o vevirion a religion.

Ra bandonint din an oll gaou a meus ellet beza bet en o andret; ra bardonint din dreist oll da lezel ganto, dre va maro euzus, euz t'arch qez dies da effaci.

Qent mervel, va diveza peden a vezo evidoc'h, va zad paour! hac evidoc'h - hu, va breudeur ha va c'hoarezet mad ha tener. N'am anconnac'hait get en ho pedennou.

Landivisiau, 3 heur aroc va maro, an 17 a vis du 1844.

Va breudeur - caer ha va c'hoarezet - caer a zo comprenet en recommandationou d'am breudeur propr, hac e ped'ân eus a greiz va c'haloz an H. Troussel (1) da bedi Doue evidon.

Ho mab, Yvon Renaot.

Ar marc'her 18 qerzu, Louisa Ego, êruet eus a Roason, a zorti eus a brison Montroulez da 8 heur eus ar mintin, evit mont da Landivisiau. Da greiz-de remet quart e t'êrje êruout, mes arrêti a eure var hed 3 denn fusuill eus a gusar, evit êruout d'an tol a greiz-de. O sortial eus ar c'har en em harpas var brec'h ar charetour, bete ma teuas an daou vourreo d'e c'hemer. Delc'hal a rë he feny stouët. (253)

Pigna eure d'ar chaffot hep harp, hac epad ma clasqe unay eus ar vourrevion eur gorden da staga anezhi, equile [a lenne (?)] ar setang, Louisa Ego a voa en he za hac he feny stouët tristamant. O veza staquet, mes he memrou libr, hac o velet savet coef he mantelê, e t'êqennas he c'hoef var he daoulagad, hac e c'holoas ê bisach gant e mouchouar godel, en eur scuilla saelou. - Chom a eure exposit adalec greiz-de betec un heur. 50 soudard eus a Voutroulez, 100 a Vrest, ha jandarmen an arrondissement a voa deut da Landivisiau evit qenderc'hal an euz. Eto pad an exposition, e voa calz a dud o sellet outi: darn a c'hrosmole, mes calz bras e voet. Gouscoude, pa voe cun-duet ermêz a gusar, evit pignat er c'har, calz a dud a heuille, en eur gomz fall diouti Anfin, pousu a eure e hent, ha rentêt en Sant-Thegonnes, e qemeraz eun tassad cafe, hac e voe digasset da brison Montroulez, demeus a behini e vezo cun-duet d'ar prison a zo destinê dezhi.

fin.

(Vol. VII: qerz, p. 244-251, strophes non numérotées; notes, p. 251-253.)